

N°111 147

Louarnig

fin ha foll !

YEAH!




NEDELEG LAOUEN !



GANT STARTIJEENN E-LEIZH !

P.5-6-7

GRA ANAOUDEGEZH GANT
HUGO, KAMPION WAR AR SURF



P.8-9

UR SKRITELL DA ZISTAGAÑ
EVIT KINKLAÑ DA GAMBR



P.4 *titeuf*

P.14-15

MEURIAD

P.11

P.12
Naggeneen

Paotr Louarn

« Sandrine,
pegen bras eo ul lapin nevez-c'hanet ? »



Salud dit Héroïse, sot on gant al lapined bihan.

Unan am boa pa oan bugel, Panpan oa e anv, evel hini ar film Bambi.

Héroïse

*Sandrine P pet centimetrac'h a ra al lapined bihan pa en ganet
Héroïse*



Bihan-tout eo ul lapin nevez-c'hanet. N'eo ket koant-tre abalamour m' eo dall ha noazh. Ret eo dezhañ chom gant e vamm en o neizh tomm fardet ganti.

Hervez spesad al lapin hag an niver a vabigoù bet ganet eo o ment. Gouzout a rez e c'hell ul lapin pouezañ war-dro ur c'hilo ha betek 10 kg evit ar gouennoù ramzel ! A-vent gant da zorn hag un tamm pounneroc'h eget vi ur yar (80gr) e vez ul lapin nevez-c'hanet...

Div sizhun goude ma vefe ganet e teu blev d'al lapin ha gallout a ra gwelet ha klevet. Goude teir sizhun e krog da vont er-maez eus an neizh met ne c'hell ket lammat c'hoazh. Sunañ a ra bronnoù he mamm c'hoazh. Foenn ha geot a zebr dija ganti se. Goude 5 sizhunvezh eo stabil war e bavioù ha plijout a ra dezhañ c'hoari chouk-lamm-penn. Da 8 sizhun e paovez evañ laezh e vamm ha gellout a ra klask bod en ur familh ! Ha goulenn a ri unan evit Nedeleg ?

Ken ar wech all !

Sandrine





UN ABADENN NEVEZ GANT TUD YAOUANK DEUS AR VRO !

PETRA
NEVEZ ?

AR BAJENN-MAÑ
A VO KAVET
IVEZ WAR
YA-OUANK.COM



BWB
brezhoweb

Un abadenn dele nevez gant krennarded a zo da welet war
brezhoweb.com pe war ya-ouank.com : DISKOUÉZ'DIN he anv.
Laors a ya da gerc'hat an den yaouank en e/he zi hag asambles
ez eont d'ober e/he dudi : marc'hegañ, c'hoari hockey, ober sirk...
Ha c'hoant `tefe kemer perzh en un abadenn ?
Pellgomz d'ar 06 98 98 66 67 pe skriv da diskouezdin@gmail.com
o tisplegañ piv out hag o reiñ da niverenn bellgomz.



Ha te, sellet `teus ouzh « Diskouez Din » dija ? Plijet out gant an abadenn ?
Respont war ya-ouank.com pe dre bostel da camille.kvb@orange.fr hag embannet e vo !



GOURC'HEMENNOÙ JULIETTE !


D'an 19^{vet} plas eo en em gavet Juliette Petres e
Hent ar Rom (rann Class 40). Mat-kenañ eo evit
unan a oa o kemer perzh er redadeg-se evit ar
wech kentañ ! Kudennoù he deus bet, traoù da
zresañ, barroù-avel, ha deuet eo a-benn,
memestra !



Korn al lernigoù

KENSTRIVADEG FOTOIOÙ NEDELEG

Profoù brav `teus tapet ?
Kas ur foto da Louarnig war tem an Nedeleg !
Embannet a vo da foto hag ur profig a resevi !



titeuf

ar skol-erc'h



Tennet eus « Kenô Bed Kriz »

www.b-heol.com

BANNOÙ-HEOL

* Lec'hioù uhel war ar menezioù ne deuz morse an erc'h warno.

* Pa gouezh sammadoù erc'h eus penn-uhelañ ar menez.

* Tuellennoù a dremen aer enno evit aveliñ diabarzh an tren, er « mogerioù ».

Surf? Pa krog ar goañv?
Ha perak pas!
Kejet en deus Louarnig
gant kampion surf Penn-ar-bed!

Hugo Tosseti

12 vloaz

Pell 'zo out kroget gant ar surf?

Da 7 vloaz e oan kroget, da zevezh ma delz-ha-bloaz!
Ur plankenn hag ur gwiskamant am boa bet da brof.

Peseurt troioù eo da re vuiañ-
karet? Carve hag Aerial.

Petra 'rez pa ne vez ket a wagennoù?

Inervet e vezan. Mont a ran d'ober plankenn-
ruilh, straniñ a ran war an urzhiataer. Sellet a ran
ouzh meteo an deizioù o tont.

☺ Ma hunvre a vefe...

... dont da vezañ kampion Bro-C'hall
ha kampion Europa. Ha gellet kemer
perzh e pol Bro-C'hall : ur skipailh a
live uhel.

☹ Petra 'ne blij ket dit?

- C'hwitañ an taol war ur wagenn vrav!
- Pa vez dour o vont e-barzh ma gwiska-
mant goude bezañ kouezhet en dour.
- P'am bez riv oa-raok en em wiskañ en-dro.

Petra 'fell dit ober pa vi bras?

N'ouzon ket c'hoazh. Ur vicher hag a laosk
amzer dleub a-walc'h din evit surfiñ!

Peseurt traezhenn eo da

« spot* » vuiañ-karet?

An Dorc'henn (La Torche) e Breizh
ha Santocha e Cap Breton
e su Bro-C'hall.

(Spot : lec'h brudet evit surfiñ)

☺ Ur meuz lipous?

Toazennoù spaghetti gant amann!

☺ Petra a blij dit ober, ouzhpenn d'ar

surf? C'hoarioù video, pleustriñ war ar plankenn-
ruilh ha selaou sonerezh.

Setu-me oc'h
ober un
'Aerial'

© Laurent Tosseti

Setu **Illona** a zo er memes klub ha me. Eus Gwidel
eo. Kampionez Morbihan, Breizh, ha beskampionez Bro-
C'hall eo e 2014! (er rann "Ondine Minime")

ATERSADENN

RIP CURL



© Laurent Tosseti

Troioù surf a blij da Hugo :


Roller



Snap



Ar plankenn surf :



Gwelet eo bet an dud kentañ oc'h ober surf e Hawaii, 500 vloaz'zo.

Abaoe 50 vloaz eo ar sport-se diouzh ar c'hiz er bed a-bezh!


Chom war-sav war ur plankenn-risklañ war ur wagenn eo ar pal. Ret eo bezañ ampart ha bezañ bet pleustret kalz evit dont a-benn. Meur a zoare a zo da vont gant ar wagenn : ar ROLLER da skover hag a dalvez mont war-raok deus an nec'h betek an traoñ o chom ouzh ur wagenn.

War peseurt aodoù e vez surfet kalz er bed ?



GERIOÙ-KROAZ

tro-dro d'ar surf





- 1- Kordennig staget ouzh troad ar surfour pe ar surfourez.
- 2- Dour sall e-lezh !
- 3- Anv ar sport hag ar plankenn
- 4- Dour o fiñval hag o vont war-raok er mor
- 5- A gaver war bord ar mor, war al leur.
- 6- A-drugarez dezhañ e c'hellez ober windsurf pe plankenn dre lien.
- 7- Pezh a ranker ober war vor evit mont war-raok, hep plankenn.
- 8- Traoùigoù a gaver dindan ar plankenn.
- 9- Gantañ eo tomm an amzer.
- 10- Gant an heol e vez ... ar c'hroc'hen.
- 11- Hepti ne c'heller ket surfiñ !




PLANKENNOÙ GEVELL....

Peseurt hini a zo heñvel mik ouzh ar plankenn-mañ ?
Muzuilh gant ur reolenn m'eo ret.



DISKOULMOÙ



Ar plankenn heñvel
mik eo an eil.




ILLONA GOASCQOEN
MOREBIHAN



QUI VOUS ENVOIE LES MEILLEURS
SURFERS DU MONDE

SON AR WAGENN GANI LOUKNIG!



HOCO TOSSEN
PENN-AR-BED

UR SAOSISON E CHOKOLAD !

AOZENNOÙ

1 DABLETEZENN CHOKOLAD
(70 PE 80% KAKAO ENNI)
100 G AMANN
100 G SUKR LINDR

1 VI
8 CHAMALLOW
150 G GWISPID
PAPER ALUMINIOM



Lakaat ar chokolad hag an amann da deuziñ goustadik gant ur banneig laezh. Meskañ herr evit ma vefe flour ar meskaj.

Ouzhpennañ ar vi, an amann gant ma n'eo ket re domm, hag ar sukr lindr.

Bruzuniñ ar gwispid ha didroc'hañ ar marshmallows a guboù bihan



Meskañ pep tra. Skuilhañ an toaz war ur follenn paper alu evit ober evel ur silzigenn dev ken hir ha 30 sm.



Plegañ ar paper tro-dro d'an toaz ha stummañ evit ma teufe da vezañ ur saosison.

Leuskel er yenez 6 eurvezh-pad d'an nebeutañ, amzer dezhañ kaletaat.



Menam !





Naggeneen

ISTOR & TRESADENNOÙ : CHRISTOPHE BABONNEAU
BREZHONEG : KEIT VIMP BEV



PLIJUS HA DIVOUTIN WAR UN DRO A DA BET KEJAÑ GANT AR BUCKWOODJENIED. PEDET E VOE NAGGENEEN GANT PENN-BRAS AR BOBL VIHAN GENTAÑ, MAGASAPA WICAYAPAZIPA* E ANV, DA VONT GANTO.



BEVAÑ A RAE AR BUCKWOODJENIED A-UNVAN GANT AN NATUR : EVEL M'EN DOA BEVET NAGGENEEN GWECHALL-GOZH GANT C'HWEZHIGELL.



KERSE BRAS EN DOA OUIZH AN NATUR ABADÉ M'EN KOA KUITAET BRO-ZWERZHON.

*Yezh ar buckwoodjenied. E brezhoneg : fri-sardon.



SEIZH TAN A DA ER MEURIAD : DA LAVARET EO SEIZH LOCH. AN HOLL A DOSTAAS A-DAOL-TRUMM OUIZH AR PENN-BRAS HAG OUIZH AN ESTRAJOUR TEV HA RUZ E FRI.



SETU HOR C'HÉRIADENN, MAGASAPA PASU".
EMICHAÑS E VI PWEET O CHOM AMAÑ.



FENOZ E VO GRAET UR FRIKO BRAS EN DA ENOR.

*E brezhoneg : fri-kastrilh. Anv Naggeneen e yezh ar Buckwoodjenied.

KARTER SANT-TEREZA, D'AN NOZ-MAÑ.
A-DAOL-TRUMM ZO BET BARROU-AVEL GWENN O KEMER
PLAS UN DISKAR-AMZER KLOUAR, EN UR SKARZHAN
BALEERIEH-STRAED WAR AR MEMES TRO A-BENN DEGEMER
AR GOANV.

RANKET O DEUS BUGALE STAG O FRI OUZH AR PRINISTR
DILEZEL ARVEST AN ERC'H O KOUEZHAN EUT MONT
DA GOUSKET.

NA TRIST EO...

... PANEVE O DIJE GWELET MARTEZE,
UR WECH SAVET O DAOLAGAD,
UR SKEUD O PIGNAT GANT AN ILIZ
HAG O CHOM A-SAV UR PRANTADIG.



DEGUEZHOUT A RIT GANT PALE. EMAD PAOL
O PAQUEZ TREMZIO AL LEC'H-MAD EUS AN TU KLEIZ D'AN TU DEHOÙ.

DIGREDUS ! PA L'ARAN DEOCH !

EUT MONT EUS TOENN LEURDI AR MAEZIOÙ FRANK BETEK E D,
TRI CHILOMETR PELLOCH, N'EN DEUS KET BALEET WAR AL LEUR.
GWECH EBET, MET REDET EN DEUS EN ERCH, A DOENN DA DOENN.
HA KEMERET LANS EUT LAMMAT DREIST D'AR STREDOÙ.

PENADS DISPLEGAN, GANT GERIOÙ, PERE EO E SANTARIDIOÙ ?
EN E-UNAN NE VEFE KET GOUEST D'EN OBER ZOKEN.

GREOMP UN TROL-ESAE EN E BLAS.

GOUEST E OA-EN DA UJELET RIZH-MAT.
PISHOC'H N'EUS KET.

BISKAZH N'EN DOA MERZET PAOL PEGEN BRAV HA DON E DA AN TRAOÙ.
AN ERCH, DA SKOER, A SEBLANTE DEZHAN KOUEZHAN A-LINENN, DIRAZAN,
HA BREMAÑ EN EM SANTE E-MESK AR FLUENNOU-ERCH, BEUZET ER C'HAERDER.

BETEK ENNAÑ E TEJE DEGADOÙ A DROUZIOÙ DEUET A-BELL GANT AN AVEL :
C'HOARZHAPENNOÙ, TROUZ DOROÙ AR METRO O SERRIN DINDAN AN DOUAR,
MOUEZHIOÙ AN ABADENNOU-SPORT ER RADIO, KIZHIER O ROUZMOUZAT :
E ZIVSKOUARN O TIBAB KERKENT AN TROUZIOÙ A-BOUEZ DEZHAN HAG
AR RE DA LEZEL DA VONT.

HAG E-MOD-SE E KROUE AN HEKLEIOÙ STRIZH, KASET GANT AR FLUENNOÙ-
ERCH BETEK E ZIVSKOUARN, EN E SPERED UN ENDRO TROUZUS D'ANAV
HA LIVET HAG A ROE KEMPOUEZ DEZHAN EN E REDADEG PRIM.

GWELET A RAE PAOL GANT E ZIVSKOUARN !



GANET EO AR PAOTR LOUARN

NOZVEZH...
ORANJEZ.

LOUARN...
ORANJEZ.

GWISKAMANT ?



PAOL!
UGENT
MUNUTENN 'ZO
'MAON O C'HERVEL
'C'HANOUT!
WAR-SAV!



KENTELIOÙ
'TO A-BENN
UN EURVEZH !

ORANJEZ.

UN NIVER...

5

MUNUTENN

a zo trawalc'h d'an Tad Nedeleg evit kas ar profoù d'an holl vugale er bed a-bezh !

KRAK HA BERR

Traouigoù pe titouroù fentus !

Dit da ginnig ivez !
Kas ur postel da
camille.kvb@orange.fr

UN DEIZ...

D'AN 18
A VIZ KERZU

العربية

Talvezout a ra ar sinoù-mañ « Arabeg ». D'an 18 a viz Kerzu eo devezh an arabeg. Ar 8^{vet} yezh eo e-touez ar re gomzet ar muiañ er bed.

SELL'TA !



Ar par an hini eo a zoug ar babigoù gant ar c'hezegmor ! (Al lodenn wenn war e gof a zo vioù e-barzh)

LABOUR-DORN AN NEDELEG



Un orañjezenn

Skoulm ur seizenn evit lakaat anezhi en istribilh

Plant tarchoù jirofl e-barzh.

HA GOUZOUT A REZ ?

An tad Nedeleg ne oa ket ruz e wiskamant er penn-kentañ.

Du pe gwer e oa ha glas a-wechoù e

Bro-Rusia.

Deuet eo

da vezañ

ruz er

skeudenoù

abalamour d'ar

bruderezh

graet evit

un evaj

brudet !



YEZH AR SINOÙ

Evit sinañ :

« naon `m eus »

Gant da dorn pleget, diskenn eus da vruched betek traoñ da gof.



©Marianne Larvol

BRAMMOÙ



Peseurt **BRAMMOÙ** ne vezont ket klevet ?


AR BRAMMOÙ LOUEDET !

Didrouz, met c'hwezh fall ganto !

DIVIN'TA

Nijal a ran hep eskell, huchal a ran hep mouezh ha gwelout a ran hep daoulagad.

Piv on ?



An avel